



Imbabourc'h

Niverenn 63
31 Meurzh 1975

I M B O U R C ' H , K E L A O U E N N
B O L I T I K E L

C ' h w e c ' h v e t b l o a v e z h

Niverenn 63

31 Meurzh 1975

Emsav hag Iliz e Breizh.....	p.59
Davet ar Prad Du.....	p.87
Kenskriverezh.....	p.91
Addispleg d'ar pennad war-lerc'h...	p.93
Darempredoù etre ar Stad hag an Iliz e Yougoslavia.....	p.95
Darvoudoù dre ar bed.....	p.99

=====
Koumanant-bloaz : 35 lur. KRP : Y.Ollivier,
1 534 25 Roazhon. Deraouiñ a ra ar c'houman-
nant e miz Genver.

Priz an niverenn-mañ : 5 lur

Ar pennadoù a zo da gas da : Y. Ollivier,
7 bd. A.-Burloud, 35 000 Roazhon.

CPPP : 50 015

K E M E N N

Setu o tont er-maez kentañ niverenn ur rummad nevez a vo moulet diwar vremañ dre eiltres.

Laouen e vimp mar gallfe ar goumananterion ha n'o deus ket graet c'hoazh kas o adkoumanant evit 1975. Anaoudek e vefemp ivez ouzh ar re a gasfe deomp un nebeut profoù.

Klask a raimp gwellaat d'hoazh doare ar gelaouenn evit ma vo aesoc'h ha plijusoc'h da lenn. Pedit a reomp al lennerion da zigareziñ ar mouler maz eo mastaret a-wechoù pajennoù zo eus an niverenn-mañ ; n'omp ket boaz c'hoazh ouzh an ardivink moulañ nevez hon eus da ober gantañ.

Pezh a vank deomp a-heend-all - ha se hon eus lavaret meur a wech - ez eo skridoù, e stummi pennadoù pe lizhiri. Mat e vefe eta d'hol lennerion a zo gouest da skrivañ kas deomp danvez evit IMBOURC'H.

=====

E M S A V H A G I L I Z E B R E I Z H

p e

K E A L U R F R A M M B R E Z H O N K R I S T E N

I

Ur seurt talbenn d'ur pennad a c'hello hañvalout iskis pe zigoulzat a-grenn da veur a hini hogen, evel ma vo klasket diskouez e korf ar skrid-mañ, klotañ a ra gant un ezhomm a zo santet gant meur a vro-garour kristen hiziv e Breizh.

Da gentañ e fell deomp lemel un amsteriad a zo silet, marteze, e spered an eil pe egile o lenn an talbenn-mañ. Pa reomp anv eta eus 'framm kristen' ne fell ket deomp lavarout e ranker sevel un doare strollad politikel kristen pe gatolik evel maz eus bet e broioù pe e riezoù zo d'ur mare zo. Ar strolladoù-se a veze renet ha meret gant ar soñj da gas kannaded d'ur parlamant bennak, da sevel ur gouarnamant pe da gemer perzh ennañ. Un hvelep mennad n'en deus ket kalz a ster hiziv evit daou abeg ; da gentañ, n'eus mui a yoc'hoù kristen am-paret dreist-holl gant kouerion hag ambilhet gant gou-vriaded ; ha d'an eil, - hogen hemañ a zo un heuliad eus an abeg kentañ, - n'eus mui kennebeut a sevenadur pe, kentoc'h, a stuzegezh kristen poblek, koulz lavaret (un diforc'h a reomp etre 'sevenadur' a zo eztaoladur ur gevredigezh kristen stadel, lakaomp, hag ur 'stuzegezh' a chom emdarzhek ha n'en em harp war lezenn na framm stadel ebet).

Keit ha maz eo en em skoret an Iliz war ur gevredigezh plouezat hengounel ha mirelour ez eo bet saviad an Iliz ivez, e Breizh, peurgent, sklaer ha didrubuilh a-walc'h. E gwirionez e c'hoarie an Iliz en hor bro ar roll a 'lerenn-treuzkas' etre renkad-ren ar c'hovriaded hengounel hag ar werin diwar ar maez. Ar c'hovriaded-se, stag a-viskoazh ouzh keal ar "berc'hentiez prevez" a oa enframmet mat en ur gevredigezh kevallaour digristen hogen na lakae ket en argoll war-eeun ha diouzhtu ar brientoù a felle dezho mirout.

Moarvat ez eo emdroet ar saviad-se tamm ha tamm goude m'en devoe ar Pab Leon XIII erbedet da gristenion 'Frañs' degemer ar renad politikel nevez ; prest eo bet neuze darn eus ar veleion d'en em glevout gant an trede Republik e Pariz ; un tamm levezon en deus bet luskad ar "Sillon", da skouer, war veleion Leon. F. Madeg - a glaskas ober eus ar "Bleun-Brug" ur strollad katolik breizhat etre an daou vrezel - a oa tuet d'an "demokratelezh" h.a. Koulskoude, dre vras, e vane an demokratelezh-se mirelour a-walc'h ha klotañ a rae ar virelouriezh-se, moarvat, gant dreistpouez ar gouerion pe ar genwerzhourion vihan diwar ar maez e Breizh en amzer-se. A-drugarez d'ar skolioù kristen savet ganti evit enebañ ouzh skolioù dizoue ar Stad c'hall e Breizh he deus gellet an Iliz tuta ha stummañ a-walc'h a veleion, a leaned hag a leanezed, n'eo ket hepken evit bastañ da ezhommoù ar bobl gristen e Breizh hogen ivez evit kas misionerion stank e pep korn eus ar bed ; ha ret eo

pouezañ amañ war dalvoudegezh ha perzhioù dispar ar veleion koulz hag al leaned pe al leanezed a oa leun a feiz ha gredus, emroet a-grenn d'o galvedigezh relijiel, ne vern pezh a soñjer, a-hend-all, diwar-benn o c'hredennoù politikel.

Mat e vefe ensellout amañ, koulskoude, pezh a oa kollus evit an Iliz er virelouriezh politikel-se. Da gantañ, stagañ a rae an Iliz ouzh ur renkad kevredigezhel e oa an tu-koll gantañ a-benn neuze ha na c'hoarie mui roll ebet er sevenadur arnevez ; breinañ a rae ivez speredelezh an Iliz, diouzh un tu, dre ma veske ar feiz kristen gant ur 'patrioterezh' stadel pagan a oa deuet da vezañ un eil relijion evit ar c'hovriaded a bourchase d'ar Stad c'hall - e Breizh evel er peurrest eus 'Frañs' - un darn vat eus he frammoù dinazel hag ar pep brasañ eus he frammoù luel ; ha, diouzh an tu all, dre ma vire ouzh ar gristenion a verzout roll breinañ an armerzhelouriezh vourc'hiz a oa degemeret en un doare bennak gant an Iliz e sigur difenn ar 'berc'hentiez prevez'. (1)

Evit pezh a sell ouzh ar vroadelezh vrezhon ez eo aes gwelout, dres, pegen drastus eo bet ar virelouriezh hag al lealouriezh politikel-se dizremmwel a-grenn. Evit gounit grad-vat levierion ar Stad c'hall ha war zigarez derc'hel en he sav an urzh diazezet - ma oa lorc'h enno o kaout perzh enni en ur stumm bennak -

(1) Soñjomp amañ e keheladur Janed Ark dibradet d'ar renk a zouez warezourez o kantreizhañ mennadoù brezelgar ur Stad vourc'hiz lik.

o deus ar gloer e Breizh traiset ar bobl vrezhon, asantet d'an arallekadur ha d'an hevelebekadur anezhañ; kalz pouezusoc'h e oa, d'o soñj, goarn al led-framm iliziek o doa lakaet en e blomm - e ser ar skolioù kristen peur-gent, - eget en em wallveskañ gant brogarourion vrezhon a oa sellet evel istrogelled.

II

Disheñvel eo, moarvat, saviad an Iliz e Breizh hiziv. Evel e Bro-C'hall hag e meur a vro all - lakaomp, riezoù Amerika ar c'hreisteiz - ez eo en em zis-taget ar gloer mui pe vui diouzh ar c'hostezennoù mirelour pe, zoken, kostezennoù ar c'hreiz. Moarvat e oa ur vojenn adal deroù ar c'hantved-mañ 'kenwallegezh' an iliz hag ar c'hastell (Bleimor a enebe ouzh ar vojenn-se war-dro 1911) ; hogen e-pad pell amzer ez eo bet stag ar gristenion ouzh strolladoù a oa anvet didaer, lakaomp M.R.P. pe U.D.R. abaoe ar brezel diwezhañ. A-c'houde ar mare-se avat ez eo emdroet buan an traoù, dreist-holl abaoe dek pe bemzek vloaz. Hep mont betek erbediñ d'o farrezianiz mouezhiañ evit danvez kannaded an tu kleiz pellañ e c'hoarvez gant beleion zo yaouank pe a grennod reiñ bod aliesik da strollouigoù kleizelour liesseurt (e-barzh karterioù zo eus Roazhon, da skouer ; bepred e Roazhon e vez gouestlet ar 'pron' da gemnadennoù ar c'hweluniadoù, ar re vat, evel just). Erfin, degouezhennoù zo evel hini ar beleg micherour Guillaume en embregerezh ar Beon en Oriant o deus roet tro da eskob Gwened, da skouer, da sevel a-du gant politikerezh kleizour beleion

zo. Ret eo gouzout ivez ez eo savet 80% eus skolidi kloerdi bras Roazhon a-du gant Mitterand pe stourm ar beleg micherour en Oriant (en eskopti Gwened avat ez eus bet eneberezh nemet n'oa ket deuet intrudu an eneberezh-se a-berzh ar rummad yaouank). Arouezius eo an devoudoù-mañ dre ma lakaont anat tuadurioù soñjal an danvez beleion a zle frammañ an Iliz warc'hoazh e Breizh (1). Gwir eo ez eo manet d'an darn vuiañ eus personed hor parrezioù war ar maez ar spered a oa dezho gwechall. Hogen - evel ma tiskouezimp en ur pennad all - ne vo den ebet da gmer o lec'h en dekvedoù da zont.

Lavaromp koulskoude e koll ur seurt emdroadur politikel un tamm eus e bouez dre 'n arbenn m'emañ an Iliz en hor bro o koll a nebeudoù ar c'hrog he deus bet war ar boblañs gwechall. Emañ an Iliz o tizeriañ e Breizh evel e meur a vro all a Gornog Europa bet kristen a-viskoazh. Tro hor bo da embann stadegoù diwar-benn stad an Iliz en hor bro. Tu a vo, dre ar stadegoù-se, da ziskouez n'eus mui hiziv an deiz e Breizh nemet ur beleg e-lec'h e oa ergentaou tri pe bevar hag emañ e karg ur person hepken hiziv bepred teir pe beder farrez e-lec'h e oa pep a berson d'ur mare zo. Aes e vo diskouez ivez o deus 90% eus ar veleion etre 35 ha 70 vloaz. E kloerdi bras Roazhon n'eus ket en tu-hont da 35-40 danvez beleg evit pemp departamant ha pemp bloavezh studi, ar pezh a askoro war eizh pe zek beleg bep bloaz evit Breizh a-bezh (1) E kloerdi Roazhon ez eo bodet kloareged pevar departamant ar "Bretagne-programme" hag ar "Mayenne" ouzhpenn.

(lakaet, eveljust, ez ay an danvez beleion-se betek an urzhidigezh hag e kendalc'hint, goude-se, da seveniñ ur gefridi a veleg, ar pezh n'eo ket anat tamm ebet).

Diaes eo gouzout e peseurt stad emañ an urzhioù hag ar breuriezhoù relijiel en hor bro hogen kredapl eo ez eo aet da hesk evito ar mammenoù tuta a oa dezho gwechall e Breizh (kv. niver al leaned hag al leanezed en hor bro e deroù ar c'hantved) ha n'eus mui da izili enno, diwar vremañ, nemet tud kozh pe tud en oad gour, den yaouank ebet, da nebeutañ er breuriezhoù hag en tolpadoù a dutadur poblek.

Bezet pe vezet n'eo mui renet ar skolioù pe ar skolajoù kristen nemet gant ur bihanniver a leaned pe a veleion hag aes e vefe jediñ ar mare ma vo bet erlec'hiet tud lik ouzh ar re-mañ e penn an ensavadurioù-se. N'eus forzh penaos n'o deus mui ar skolioù nag ar skolajoù-se an dalvoudegezh o devoa gwechall ; aet eo da get en o c'hreiz ar stummadur kristen a veze roet d'o skolidi (ne vern a-hend-all ar pezh a soñjer eus ar stummadur-se). Adal bremañ avat n'eus mui kalz a gemm e-keñver speredegezh etre ar skolioù 'prevez' - betek ur poent zo - hag ar skolioù kefridiel stadel. Setu, a-boan e vo merzet steuzidigezh ar skolioù kristen, aspadenn diwezhañ ur gevredigezh bet kristen, a-benn pemzek pe ugent vloaz d'an hirañ holl.

Moarvat, evit bezañ reizh, e ranker anzav n'eo ket bet diskar an Iliz e Breizh ken trumm na ken klok ha m'eo bet e-barzh broioù zo bet e dalc'h ar gatol-

igiezh betek an deiz a hiziv ; n'eus ket bet gant ar veleion, leaned ha leanezed eus ar rummadoù kozh un dilezadeg pe ur renaviadeg a seurt gant ar re a zo c'hoarvezet, a-hervez, e broioù zo, evel ar C'hebeg, lakaomp ; hogen un azon eo evelkent eus dizeriadur an Iliz niver ar presbitalioù pe berc'hentiezhoù a iliz liesseurt a vez lakaet e gwerzh bep bloaz. Ivez, distreiñ a reer gladoù arall diouzh o c'hefridi orin ; dont a ra tiadurioù an tolpadoù leaned ha leanezed da vezañ tiez-hañv, tiez-ehanoù h.a. Kredapl eo zoken ne servijo mui an darn-vuiañ eus hon ilizoù da servij relijiel ebet koulz lavaret a-barzh fin ar c'hantved. Tonket eo eta d'ar c'humuniezhoù relijiel kozh e Breizh mont da get a-benn tregont vloaz bennak ac'hann o vezañ m'eo aet da hesk ar vammenn duta anezho a zo bet kevredigezh plouezet hengounel an naontrkvet kantved. Setu, bez e c'heller lavarout ez eo tizhet an Iliz hag ar relijion e Breizh gant an hevelep argerzh dizeriañ a zo o tistrujañ hiziv an teodyezhoù brezhonek hag ar stuzegezh kristen e kornog ar vro-mañ, lakaomp. An eil re koulz hag ar re all, a-hend-all, a zo aspadenoù ur sevenadur o koazhañ mui-ouzh-mui bemdez.

III

A n e m s a v h a g a n I l l i z

E-barzh "Istor an Emsav" - betek 1918 - ez eus bet graet anv eus an darempredoù etre an Iliz hag an Emsav e deroù ar c'hantved. E gwirionez ez eo diaes komz eus darempredoù gwirion. Merzout a c'hello

~~unan e vev e dreuz an oberenn o deus atebeg an Iliz~~
e Breizh skoazellet dre zegouezh ar brezhoneg evel ur
voger a-enep d'ar mennoziou arnevez o tont eus kêr hag
eus ar Stad dre ar galleg ; hogen arouezennel hepken eo
bet o skoazell a-hed ar wech. Diouzh un tu all, darn eus
ar stourmerion o deus klasket unaniñ en o youl hag en o
c'halon o stourm evit ar vro hag ar yezh gant ar stourm
evit an Iliz hag ar Feiz nemet se o deus graet hep diaz-
ezañ etre an daou stourm-se un ere kempoell bennak ;
dangorel hag hiniennel a-grenn e oa eta o emzalc'h.
Hemañ a oa degouezh Kalloc'h, da skouer.

Erfin, da stourmerion all ez eus bet fel-
let lec'hiañ o obererezh breizhek brogar e diabarzh an
Iliz end-eeun : setu pezh ez eo bet mennad Yann-Vari
Perrot en deus savet ar "Bleun-Brug" e 1905..

En em c'houlenn a c'heller perak n'en
deus ket klasket Yann-Vari Perrot sevel un aozadur brezh-
on dishual, politikel pe sevenadurel. Neb a rafe ar gou-
lenn-se avat a ziskouezfe n'en deus ket an disterañ
soñj eus saviad an Iliz d'ar c'houlz-hont e Breizh.
Diouzh un tu e oa anezhi framm speredel ur vroad unvan
a dri milion a dud ; par e oa he galloud da hini ar Stad
c'hall, en ur stumm (ha kement-se, dres, a ziskleir pe-
rak e oa ken taer ar c'henstok etrezo o div e deroù ar
c'hantved) ; n'eus mar ebet e oa gouest an Iliz da reiñ
darbar d'ar Stad c'hall e Breizh da vare lezenn an Dis-
parti, lakaomp. Diouzh un tu all ivez e oa d'an Iliz
perzhioù stadel, ur galloud gwirion, o kavout e sichenn

en ur genurzh strizh ha na oa ket bepred avieled tre.
Pa ouzer avat e oa 90% eus ar boblañs e Breizh en amzer-
se leal ha sentus ouzh an Iliz e komprenere o dije soñjet
stourmerion vrezhon zo d'ar mare-se en hor bro e ranked
tremen dre an Iliz evit tizhout ar bobl e Breizh. Ouzhpem-
pomp ne oa aotreet obererezh politikel ebet d'ar veleion
d'ar c'houlz-hont ha nebutoc'h c'hoazh, eveljust, oberer-
ezh 'dispac'hel' ebet (evel an hini o tennañ da adsevel
ur 'Stad Vrezhon'). Ne oa degemeret obererezh kevredig-
ezhel ha politikel ur beleg nemet diouzh ma oa tu d'e
glenkañ en 'obererezh katolik' dre vras.

E devoud e oa ar "Bleun Brug" - e soñj ar re
o devoa roet koñje d'e sevel - ur skourr eus an 'oberer-
ezh katolik' en eskopti Kemper, mennet da levezoniñ ur
gennad zo eus ar boblañs diwar ar maez en eskoti-se end-
eeun (e Leon ez eo bet diazezet ar "Bleun-Brug"), an hini
a oa frammet gant gouvriaded techet d'ar rannvroelouriezh
ha, moarvat, evit ober plijadur d'ar re-se an hini eo ez
eo bet teurvezet gant an eskopti plediñ gant ar "rannvro-
elouriezh" a oa sellet evel ul lodenn eus an "hengounel-
ouriezh" a neuze. Ar mennad a oa derc'hel ar boblañs di-
war ar maez feal d'ar "gizioù kozh kristen" a wechall, ar
yezh o vezañ sellet evel unan eus ar "gizioù kozh" en ur
gevredigezh henvoazel a hañvale neuze bezañ peurbadus.
Diouzh ar sellboent-se e oa "Feiz ha Breiz" hepken unan
eus kelaouennoù led-kefridiel an eskopti ma oa ar rener-
ion anezhi anvet gant mererezh an

eskopti. Gwelout a reer dre se pegen strizh e oa tachenn oberiañ ar "Bleun-Brug" ha nad ae ket en tu-hont da aozidigezh ur gouel poblek bloaziek ha da embannidigezh ur gelaouenn viziek henvoazelour. Lavaromp ivez ne oa ket Yann-Vari Perrot e unan deuet mat da bennadurezhioù eskopti Leon a selle outañ evel ouzh un danvez dispac'her a oa da zisfiziout outañ gant ar brasañ evezh.

Dre vras eta ez eo chomet ar "Bleun-Brug" a-raok ar brezel kentañ ur strollad a obererezh kristen rannvroelour. Pa implijomp ar ger "s t r o l l a d" eo arabat bezañ faziet, avat : ne oa o labourat ennañ nemet ur bagadig a stourmerion ; biskoazh ne vije bet aotreet ar "Bleun-Brug" gant eskopti Kemper na da stummañ izili e-kenver ar stourm evit Breizh hag ar Feiz na da sevel diwar ar re-se ur framm bennak. Moarvat, kent ar brezel kentañ bepred, e oa bet anv a grouiñ un doare aozadur kristen ; Erwan ar Moal (meneg a reomp anezhañ pelloc'h) en doa bet ar ratozh-se dreist-holl ha skrivet ez eus un nebeut dilinennadoù war an divoud-se e-barzh "ISTOR AN EMSAV". Kounomp eta ar respont a oa bet graet gant an darn-vuiañ eus ar stourmerion da Erwan ar Moal : ne oa ket dav sevel ur strollad katolik arbennik peogwir e oa kristenion eus ar pep brasañ eus izili ar c'hostezennoù breizhat. Neuze ivez, o vezañ ma oa an tu-kreñv gant an Iliz tra ma oa ar vroadelezh hag ar yezh o koazhañ buane soñje stourmer ebet e talvez ar boan en em chalañ gant an Iliz e Breizh.

Ar gristeniezh a chome eta un afer prevez a-grenn evit pep emsaver. Dre se, moarvat, e c'heller diskleriañ diseblantted ar stourmerion vrezhon gristen zoken ouzh an Iliz ; hogen an diseblantted-se he devoa emichañs ivez un arbenn all : mererezh an Iliz c'hall e Breizh a oa enebet ouzh an Emsav e Leon hag e Kernev, sur mat, hogen ivez e Sant-Brieg hag e Treger.

An eneberezh-se, a-hend-all, a voe kiriek da c'hwitadenn ar "Bleun-Brug" politikel etre 1926 ha 1930. F. Madeg - tro hor bo da gomz eus ar stourmer-se e-barzh ISTOR AN EIL EMSAV - ur beleg a Leon anezhañ, en devoa fellet dezhañ ober eus "Bleun-Brug" Yann-Vari Perrot un doare strollad katolik breizhat en dije stourmet evit gounit da Vreizh un doare emvelestrevezh, dreist-holl war dachenn ar skolioù hag ar gelennadurezh (gouzout a reer ez eo bet kreñv tre d'ur mare ar skolioù kristen en hor bro). Kemblac'h e oa ar stourm a felle dezhañ ren da hini Elzasiz a reuzie d'ar c'houlz-hont ouzh ar prosezou e oa gouarnamant Pariz oc'h itrikañ ouzh emsaverion ar vro-se hag a strive a-hend-all evit derc'hel en he sav ar reizhiad-keleenn arbennik a oa bet aotreet dezho gant an Alamaned.

Evit difenn ar politikerezh-se en devoa /savet Frañsez Madeg ur gelaouenn a oa bet anvet "LA PATRIE BRETONNE" a zeuas er-maez e-pad un nebeut bloavezhioù etre 1926 ha 1930. Siwazh, tro-wenn a reas ar politikerezh-se dres en abeg da eneberezh eskopti Kemper ha Leon a zifennas gñs ouzh yaouankizoù an eskopti emezelañ er Strollad

lad nevez. Ar berz-se lakaet war ar Bleun-Brug politikel koulz hag an dizunvaniezh etre izili Leon hag izili ar rannvroioù all a skoas taol ar marv gant an danvez strollad katolik nevez. Yann-Vari Perrot chomet e unan penn a rankas plegañ da ober eus ar Bleun-Brug ur c'hevredad folklorek bennak.

N'eo ket al lec'h amañ displegañ dre ar munud arbennoù mererezh eskopti Kemper da verzañ an danvez strollad katolik breizhat. Lavaromp hepken berr ha bern o devoa aon ar re a oa e penn an eskopti rak bezañ trubuilhet gant ar pennadurezhioù stadel gall m'o dije aotreet d'ur strollad emrener breizhat oberiañ e diabarzh an Iliz e Breizh ; diouzh un tu all e toujent ivez n'en dije ur seurt strollad kevezet gant an "obererezh katolik" ha krennet levezon hemañ e-touez kristenion an eskopti.

E-giz ma ouzer e voe adsavet ar "Bleun-Brug" goude ar brezel diwezhañ dindan renerezh F. Mevelleg G. ar Moal. Evel e rakkerzher eus an etrevezh-brezel e pledas dreist-holl gant gouelioù poblek a seurt gant ar re a oa bet aozet gant Yann-Vari Perrot end-eeun. Pezh a ranker merkañ avat eo e voe roet d'ar strollad d'ar c'houlz-se un tuadur muioc'h lealour ha kempennelour eget a-raok hag e-pad ar brezel ha kement-se war un dro diwar ar spont a rene en emsav dre vras war-lerc'h darvoudoù 1944-1945 hag ivez diwar ar spi da c'hounit fizians eskibion c'hallgar Vreizh an eil goudevezh brezel.

Ar gentsidigezh hag al lealouriezh-se ne zegasjont ket kalz tra d'al luskad. Moarvat e voe aotreet aozañ kenstrivadegoù "brezhoneg" e diabarzh ar skolioù kristen (e gwir kenstrivadegoù kanañ e brezhoneg pe boelladennoù seurt se) hogen ken izel e vane al live ma ne ziogele ket zoken un anaoudegezh elfennel eus ar yezh. War ar marc'had, drebenn d'e bolitikerezh kempennelour, e voe degaset ar Bleun-Brug da genlabourat gant strolladoù likour a bep seurt, lec'hiet "a-gleiz", ha koll a reas dre se, tamm ha tamm, al liv 'iliziek' - ne lavaromp ket 'relijiel' rak n'oa ket bet ul luskad relijiel biskoazh - en doa klasket reiñ dezhañ a-ziagent. A-c'houdevezh e troas ar Bleun-Brug d'ul luskad led-kleizat dishual hep darempred ebet gant un Iliz a oa deuet da gozhañ ha da goll he galloud tamm ha tamm.

Disoc'h an emdroadur-se ez eo bet an disrann nevez c'hoarvezet etre an tuad "araogelour" hag an tuad "mirelour" derc'houezet hiziv gant an ao. Mevelleg hag ar gelaouenn "Bleun-Brug" hec'h unan.

N'eus forzh penaos nag an eil nag egile eus an tuadoù-mañ n'o deus mui roll na dazont ebet ken e diabarzh an Iliz ken er-maez anezhi. An abegoù eus steuzidigezh ar gronnad-se, a-hend-all, a zo aes da gompren : amsteriek eo bet bepred e roll. Diouzh un tu e rae an Iliz gantañ o soñjal e c'hellfe he sikour da zerc'hel war ar maez ur stuzegezh plouezet a oa a-du gant ar relijion, war a grede ; diouzh un tu all e klaske brogarourion zo implijout framm an Iliz evit saveteiñ

aspadennoù ur vroadelezh vrezhon o tisleberiañ bemdez. Dreist-holl avat ne c'helle ar Bleun-Brug embreger gwered ebet war donkad ar bobl vrezhon dre m'en em harpe war ur renkad o steuziañ, hini ar gouerion dishual henvoazel, ha war un aozadur o tizeriañ, an Iliz hengounel a zo hanter marv a-benn bremañ.

Da stagañ ouzh istor ar "Bleun-Brug" e vefe hini un nebeut arnodoù a zo bet renet e-pad ha goude ar brezel diwezhañ evit reiñ ur spered brogar da vugale ha yaouankizoù Breizh.

Unan anezho a zo bet ar gelaouenn OLOLE hag URZH GOANAG BREIZH a voe diazezet gant Herri Caouissin, unan eus kenlabourerion Yann-Vari Perrot. Ur wech ouzhpenn e oa eus "URZH GOANAG BREIZH" un heklever diwar un oberenn gembreat a zo padet betek hiziv : URDD GOBAITH CYMRU ; bez e oa OLOLE kelaouenn al luskad-se ha dont a reas er-maez e-pad ar brezel ; skridaozet e oa e galleg hepken, koulz lavaret, ha dezhi e oa ur spered brogar hengounelour, giz kozh un tammig, marteze, kristen avat. Evel oberennoù all an eil emsav e steuzias ar gelaouenn hag al luskad war-lerc'h ar brezel. Amzer o deus bet koulskoude da zegas d'an emsav un nebeut stourmerion.

War-dro dibenn ar bloavezhioù c'hwegont en deus klasket Herri Caouissin adsevel an oberenn-se ; embannet en deus un tregont bennak a niverennoù eus OLOLE, hep mareadegezh resis ebet avat ; miret en doa ar rener d'e gelaouenn an doare a oa dezhi e-pad ar brezel ha na glote ket nemeur, marteze, gant pezh a c'hoante

ar remziad yaouank ; diaes e voe dezhañ, a-se, kavout koumanaterion ha lennerion ha dic'hallus adsevel ul luskad a seurt gant URZH GOANAG BREIZH e-pad ar brezel.

N'eo ket dav klask diskleriañ amañ abegoù c'hwitadenn an arnod-mañ. Se a c'hellimp ober en ur pennad all e-lec'h e vo tu ivez da blaenaat abegoù ur c'hwitadenn all, hini BLEIMOR a yeas en-dro adal de-roù ar bloavezhioù pemont war-lerc'h an eil brezel.

Bez e oa eus BLEIMOR eta ur gronnad skauted enframmet er "Scouts de France" nemet aotreet dezhañ en em ziskouez breizhat. Gwriziennet e oa ar gronnad-se e Pariz e-lec'h e oa bet krouet hag e-lec'h e veve an diazezer anezhañ. Un tamm brud en deus bet ar stroll-se e Paris e-pad un toullad bloavezhioù ; bep bloaz, d'ur mare, ez aoze, da skouer, ur "wezenn Nedeleg" evit bugale vreizhat kêrbenn Bro-C'hall.

Pezh a zo sur, n'eus forzh penaos, eo ne reas berzh un tammig al luskad-se nemet e Pariz. Moarvat e klaskjod sevel un nebeut kreizennoù e Roazhon, e Brest pe e Kemper hogen ne badas ket pell ar c'hreizennoù-se. Un nebeut kampoù, ivez, a voe dalc'het e Breizh, e-tal Kemper pe e Kallag, lakaomp, hogen kement-se n'eo ket bet kalz tra.

A-c'houdevezh, dre ma emdroe ar "Scouts de France" war-du ur meni kleizouriezh, o tilezel mennadoù ar skautelezh hengounel, e klaskas BLEIMOR bezañ enframmet en un aozadur skauted nevez a voe anvet "Scouts d'Europe" ("Skaouted Europa") ; en aozadur-mañ e oa bet

deroet da Vreizh dezvad ur "vro" europat (evel "Bayern", lakaomp), ha kement-se, war an taol, a hañvalas bezañ un drec'hadenn vras. E devoud avat e steuzias buan an uhelvennad europat en aozadur nevez a zeuas da vezañ, er pleustr, - e "Frañs", da vihanañ - repu ar skaouted kristen hengounelour, pezh a oa yac'hus e-keñver relijion d'ur mare maz ae da voged pennwirionezioù ar Feiz kristene diabarzhan Iliz end-eeun, - hogen, ivez, repu ar skaouted mirelour ha dehouelour gall evel maz eur e-barzh tiegezhioù bourc'hiz kilstourmer a Vro-C'hall. A-benn ar fin, marteze, n'eo nemet e Roazhon, peogwir e oa eno brogarourion vrezhon war an dachenn, ez eus bet klasket reiñ un tamm spered ha deskamant breizhat d'an danvez skaouted yaouank.

Dre se ivez echomas an dezvad bro a oa bet aotreet da Vreizh mojennel a-grenn. O vezañ ma ne voe tutaet an izili nemet en ur metou bourc'hiz gal-lekaet a-viskoazh ne voe ket tu da reiñ un awenadur brezhon gwirion d'an aozadur.

E-lec'h krouiñ ha ledañ un aozadur skaouted vrezhon vrogar ez eas P. Keraod enta da rener un aozadur a skaouted virelour gall. Heñvel e voe ivez e donkad ouzh hini e haroz Jorj Kadoudal a droas kein da Vreizh evit en em lakaat war-eeun e servij mistri c'hall ha na raent forzh ebet eus e vro.

Paouezet en doa P. Keraod, d'ar mare-se, a embann ar c'helaouennoù skaout breizhat en devoa renet abaoe ar brezel, SKED, da gentañ, ha STURIER BLEIMOR, da c'houde a zeuas er-maez betek dibenn ar bloavezhioù

c'hwegont. Awenet e oa ar c'helaouennoù-se gant ur spered kristen ha breizhat brogar hogen ivez gant temoù an ideologiezh virelour gall (brud a oa roet enno en deroù, e-barzh SKED dreist-holl, da wengelioù dehouat zo evel hini ar "Rener", kemblac'h d'ar gwengelioù kleizat diouzh ar c'hiz hiziv en emsav evel ar Werin, ar Yoc'h pe an Dispac'h.)

An dislavar etre ar vrogarouriezh vrezhon hag ar virelouriezh c'hall en deus devoudet tro-wenn ar stroll BLEIMOR, a gav deomp. Forzh penaos ne oa ket fur faltaziañ e oa tu da grouiñ un aozadur brezhon hep bezañ kemeret amzer da stummañ frammataer ebet war an dachenn, o fiziout moarvat en ur vrogarouriezh vrezhon emdarzhhek. E devoud, pe ez eo distroet ar re o deus kemeret perzh en oberenn d'ar virelouriezh c'hall rik, pe ez int aet davet ar gleizouriezh vrezhon a zo al lusk ganti er mare-mañ. Ret eo krediñ eta n'eo ket bet empenet mat al labour a felle da B. Keraod kas da benn e rez an emsav. Hogen ar faziadur-se a vo tu da ziskleriañ ez hiroc'h en ur pennad eus istor an trede emsav.

§§§§§

Ratozh "UNVANIEZH SPEREDEL BREIZH" diazezet e-pad ar brezel diwezhañ - e 1943, m'em eus soñj mat - a oa diseurt a-grenn ha disheñvel tre diouzh hini al luskadoù hon eus taolennet betek henn. Da gentañ e rae - hag e ra bepred - gant ar brezhoneg hepken. A-hend-all he doa kemeret da bal bodañ kristenion an Emsav hag o c'hennerezhañ en o buhez kristen. E sell da se e voe aozet, er penn-kentañ, goude ar brezel, un nebeut retredoù; evel maz eus bet aozet unan bennak e 1973, da skouer.

A-c'houdevezh avat ez eo aet war goazhañ obererezh an UNVANIEZH SPEREDEL ken n'eus manet dioutañ a-benn ar fin nemet un emvod bloaziek d'ar c'hentañ a viz Mae e-lec'h en em gave, war-bouez nebeut, izili KUZUL AR BREZHONEG ha SKOURR BREIZH AR C'HENDALC'H KELTIEK ; paouezet eo bet, a-hend-all, gant an emvod-se abaoe un nebeut bloavezhioù.

Meizet e oa bet an UNVANIEZH SPEREDEL en deroù, eta, evel un doare breuriezhi relijiel emsavel (kv. embanridigezh AR BEDENN EVIT AR VRO e-pad ar brezel.) Bez ez eus bet anezhi ivez a-hed ar bloavezhioù un doare stael-kelaouiñ a gomze en anv kristenion an emsav hag o leuriade dirak an eskibion (en un amzer m'o devoa an eskibion c'hoazh un tamm pouez e buhez an Iliz) en ur gomz en o anv ; kas a rae lizhiri d'an eskibion eta pe gemennadennoù d'ar Wask. Bez ez eus bet anezhi ivez ur stroll studi hag embann he deus graet en un doare reoliek kaieroù STUDI HAG OBER. Padal ret eo anzav n'eo ket aet war-raok evel aozadur ha kiriek eo d'he morgousk, emichañs, ar saviad amsteriek anezhi : n'en em ziforc'he ket mat diouzh strolloù emsavel rik evel KUZUL AR BREZHONEG pe ar SKOURR ; e-pad pell amzer ez eo bet dalc'het speredoù an izili anezhi gant tabutoù diabarzh bihan an 'emsav', evel hini ar skritur ; ar re a zeue zoken d'an oferennoù bloaziek a felle dezho a-wechoù, hepken, ober plijadur d'ur 'c'henemsaver' ; rak-se e oa diaes labourat azevri war dachenn biaoel an UNVANIEZH hag a oa ar Feiz hag ar relijion gristen.

Kent klozañ ar rannbennad-mañ e fell din lavarout ur geriennoù bennak diwar-benn daou arnod all da sevel strolloù kristen e par an Emsav.

Unan anezho a zo bet renet gant Armañs ar C'halvez ha Yann Talbot dindan anv "BREURIEZH SANT ERWAN". Mont a reas ar stroll-se en-dro etre 1967 ha 1971, war-bouez nebeut, a gav din. E amkan e oa bodañ kristenion yaouank eus ar Goueled hag o lakaat da blediñ gant an emsav hag ar Feiz e brezhoneg. E devoud e voe dalc'het kampoù labour evit ar re yaouank-se - etre 16 ha 18 vloaz bennak, a soñj din - hag enno e vezent emellet o kempenn chapelioù kozh a oa o kouezhañ en o foull ; emzivizoù ha breutadegoù a veze dalc'het ivez ; erfin, tu a gave ar re yaouank da gejout gant an dud diwar ar maez, e brezhoneg bepred. Er c'hampoù o unan ne veze klevet nemet brezhoneg.

Embannet e voe ivez ur c'hannadig e brezhoneg gant Armañs ar C'halvez, dindan an talbenn "MOUEZH SANT ERWAN" hogen leuniet e voe ar pajennoù anezhañ dreist-holl gant Yann Talbot, p'edo hemañ o vevañ en Afrika, peurgent.

War-lerc'h marv Armañs ar C'halvez e deroù 1972 ez eo paouezet ar strivad-mañ. Diaes eo gouzout hiziv peseurt frouezh a zo bet dezhañ. "BREURIEZH SANT ERWAN" n'eo ket bet biskoazh un aozadur frammet ha n'o deus graet ar re yaouank nemet tremen enni (evel ma reont un tamm, war ul live all, e SKOL AN EMSAV nemet a zo padet evelkent). Setu dres avat si ar strivad : er par

m'emañ an Emsav, oc'h eginañ a-boan, ne servij ket da galz tra an darempredoù berrbad a c'heller skoulmañ dre zegouezh gant hiniennoù ha n'int ket mennet da chom en emsav peogwir n'o deus arbenn mat ebet d'henn ober.

An darempred war-eeun gant ar bobl a zo ken kerseüs all. Pledañ a c'heller gant ar re gozh hag ar re baour (ha n'int ket da gemmeskañ tamm ebet gant al labourerion kenurzhiat ha n'int ket dizifenn tamm ebet) dre garantez kristen hogen arabat bezañ en gortoz e vo gouest ar re-se, goude ma oufent c'hoazh un tamm rannyezh vrezhonek bennak, da adsevel ur gevredigezh brezhon ha kristen drezo o unan.

Moarvat ne c'hellas ket ar re yaouank a zo tremenet dre gampoù "BREURIEZH SANT ERWAN" reiñ ur ster leun d'an obererezh o deus renet pa oant krennarded rak hini ebet eus ar re a zo bet perzhiek ennañ n'en deus teurvezet kenderc'hel gant an ervenn bet boulc'het en o raog gant Armañs ar C'halvez ; dre un enklask e vefe aes henn diskouez ; ar re o deus miret ar yezh zoken en ur stumm bennak a zo bet dedennet gant ar gleizelouriezh hag an anarkouriezh diwar-c'horre a ra o reuz el luskad brezhon er mare-mañ. Kement-se a ziskouezfe a-walc'h ne c'hell ket an talvoudoù kristen bezañ anavezet gant ar re yaouank en ur gevredigezh digravez nemet ensammet e vefent en ur stroll frammet start ha dihun mat ennañ skiant ar Feiz kristen.

Evit echuiñ e ranker menegiñ ur strivad all a yeas en-dro etre 1970 ha 1972 hag a oa e dalbenn

"KRISTENION BREIZH". Dindan an talbenn-se e voe moulet ur skritell hag a voe peget un tammig e pep lec'h e Breizh. Embannet ha skignet e voe ivez tri levrig bihan e galleg, unan anezho o klask dedalvezout da zegouezh Breizh kelc'hellennoù zo eus ar Bibion, unan all oc'h esaeañ reiñ un dalvoudegezh hollek d'an Emsav er stourm evit ar Feiz kristen. Kraonell an danvez aozadur-se a oa un tolpadig emsaverion gristen oc'h en em vodañ bep an amzer evit studiañ darempredoù ar Feiz hag an Emsav. Padal en em gave er gronnad-se gallegerion ha brezhonegerion dizesk ha dre ret, eveljust, ne veze implijet er bodadennoù nemet galleg. An diforc'h yezh-se ne c'helle nemet skoilhañ ar stourmerion en o labour. Hogen abegoù all a voe da c'hwitadenn an arnod-mañ. Ne voe ket bodad "KRISTENION BREIZH" evit termeniñ na pal na kefridi resis ebet d'e obererezh ; ne ouie ket an izili anezhañ ha bez' e tleent mont war dachenn ar relijion e diabarzh an Emsav pe ur politikerezh breizhat awenet gant pennaennoù kristen, pledañ gant un aozadur a studi serr pe ur strollad a vru-derezh digor h.a. Sklaer e oa koulskoude e oa an hent diwezhañ-mañ un hent dall : sevel ur strollad digor d'ar gristenion - da lavarout eo, da gement hini a lavar ez eus ur c'hristen anezhañ - ne gas da neb lec'h adal ma n'eus mui unvaniezh ebet etre ar gristenion war dachenn ar politikerezh breizhat pe ar politikerezh hollek - paz eus anv a vodañ brogarourion vrezhon - na zoken war dachenn ar Feiz (pell bras emañ ar gristenion diouzh en em glevout a-zivout roll ha pouez ar Feiz hag an Iliz er politikerezh, lakaomp). E-barzh emvodoù zo eta en

talvoud "enkilus" e gwirionez a rank plegañ ha steuziañ bepred dirak talvoudoù a-us dezhañ ; sed pezh a ra ar gristenion - beleion anezho a-wechoù - a ro al lec'h kentañ hiziv d'ar 'stourm-dieubiñ' pe d'ar stourm etre-renkadoù hep klask o zrehontiñ e nep doare hag hep sel-lout zoken en tu all d'ar stourmoù-se renet, n'eus forzh penaos, gant emsaverion estren pe enebour ouzh an talvoudoù kravezel ; damheñvel eo eta savlec'h ar feizourion-mañ ouzh hini ar rannvroelourion a-zehoù a wechall a isurzhi Breizh da Vro-C'hall pe d'an nevez-rannvroelourion a gleiz a hiziv a laka ar stourm brezhon a-is d'ar stourm etre renkadoù pe d'an dispac'h hollvedel.

Ne fell ket din lavarout e tle an holl stourm evit an hevelep talvoudoù. Ar pezh a fell din lavarout hepken eo n'eo ket fur d'an dud a feiz - sañset - pe, zoken, ez eo diboell ha direizh eus o ferzh, en un enkadenn eus talvoudoù ar gravez hiziv, gwashaat saviad an talvoudoù-mañ o chom hep stourm a-zevri evito. An dibab a zo da ober war an dachenn-mañ a zo heñvel ouzh an hini a zo da ober war dachenn ar yezh hag ar vroadel-vezh : divizout ur wech evit mat ha miret e vo talvoudoù zo pe get. E gwirionez ne gredan-me ket ez eo bet graet an dibaboù-se da vat gant an darn-vuiañ eus ar vrogarourion a ra eus ar stourm un doare diduamant hag a ziskenn ar relijion e renk un doare folklor, hag int oc'h embann ez eus kristenion anezho a-hend-all.

En degouezh-mañ ez asoupimp ouzh an hevelep dislavar peurbadus : penaos lakaat da glotañ

talvoudoù hollveziadek ar gravez gant talvoudoù unveziadek ha dibar ar vrogarouriezh ? Daoust ha ne vefe ket tu da oberiañ e framm an Iliz c'hall en ur vro c'hallekaet evel Breizh evit adsevel ar spered relijiel kentoc'h eget klask krouiñ ur framm brezhon evit ur vroad n'eus ket anezhi da vat evit c'hoazh ? Hemañ a zo ar goulemm a c'hell sevel da spered ur brogarour brezhon kristen hiziv.

Betek ur poent zo e rankimp anzav n'omp ket evit reizhabegañ a-grenn an diviz a gemeromp da stourm evit ar Feiz kristen e rez un danvez broad vrezhon ; padal e ranker anzav n'eo ket lec'hiet gwelloc'h egedomp kalz ar re a stourm evit un uhelvennad bennak e par Bro-C'hall : n'eo ket kalz suroc'h e vo ur vroad c'hall warc'hoazh eget ur vroad vrezhon daoust d'an diavaezoù a hiziv. N'eo na diouzh galloud na diouzh youl den ebet e ve bev warc'hoazh n'eus forzh peseurt broad.

Gwelomp an traoù avat evel m'emaint er mare-mañ. Daoust ha bez e c'hell ar vroad pe an Iliz c'hall hon harpañ da seveniñ hor mennad ha mirout ouzhimp a gouezhañ en utopegezh un emsav ha na hañval ket, evit ar mare bezañ gouest na mennet zoken da drec'hiñ. Ar respont a raimp eo ez omp barnet, ne vern penaos, d'an utopegezh rak Bro-C'hall a zo echu adal bremañ he zonkad a vroad dishual ha kristen ; a-barzh fin ar c'hantved ne vo mui ar gristenion nemet ur bihanniver e Bro-C'hall evel e Breizh ; adal bremañ avat ez eo ken bruzhnet an Iliz c'hall ma ne gred mui eskob ebet komz en hec'h anv

pe ma ra e vezo bepred war var da vezañ dislavaret gant n'eus forzh piv en em lavaro kristen. Peseurt sikour a c'hello degas da gristenion Vreizh ur sektenn na vo ken enni nemet 5% bennak eus ar boblañs ? Hep kontañ e vo disheñvel bras ar plegennoù m'en em gavo enno Iliz Vro-C'hall diouzh ar plegennoù m'en em gavo enno Iliz Vreizh, moarvat.

Rak setu an dalc'h. Daoust d'ar pezh a soñj lod marteze n'eus ket a Iliz hollvedel ha difetis ; stag eo an Iliz hag ar Feiz ouzh un istor bennak, da lavarout eo, ouzh ur sevenadur : pe e teu ar gristenion a-benn da awenañ ur sevenadur en ur gemer perzh er grouidigezh anezhi pe ez a an Iliz da get er vroad n'he devo ket kemeret perzh er grouidigezh-se. Da lavarout eo, stag eo emled ar Feiz ouzh ur stumm bennak a bolitikerezh. Hogen deomp pelloc'h ha lavaromp ez eo aozidigezh an Iliz un devoud sevenadurel ha politikel ha n'eo ket speredel ha relijiel hepken.

Betek hiziv avat n'o devoa ket an emsaverion gristen netra da grouiñ e Breizh war an dachenn-se o vezañ ma oa enframmet ar gristenion e Breizh en Iliz c'hall ; a-se ivez n'o devoa an emsaverion gristen lec'h ebet en Iliz. A-barzh pell e c'hoarvezo e Breizh war dachenn ar relijion ur goulloer hag a vo karget, marteze, gant ar c'helennadurezhioù politikel a zo dezho un diabellweled trabedel ha led-relijiel a seurt gant an hini a zo kinniget gant ar marksouriezhoù liesseurt. Daoust da se avat n'eo ket sur tamm ebet e c'hell seurt

An dalc'h eo gouzout ha bastañ a ra seurt kelennadurezhioù da ezhommoù kravezel mab-den. Ma ne reont ket o deus ar gristenion e Breizh ur roll bennak da c'hoari.

Eveljust n'eo ket aes bevennañ maez oberiañ un danvez Iliz emsavel e Breizh. Diboell e vefe meizañ he c'hefridi hag hec'h amkanioù e rez ar vroad pe ar sevenadur hepken ; ampleg pep Iliz eo ar Feiz hag hep Feiz n'eus Iliz ebet ; dre se n'eur ket evit distagañ un danvez Iliz vrezhon diouzh an Iliz hollvedel (da lavarout eo 'katolik') hervez hec'h istor hec'h unan ; da lavarout eo, diazezoù un Iliz vrezhon n'int ket da gavout en istor Breizh evel istor politikel hogen en istor an Iliz e Breizh, stag ouzh istor ur gumuniezh politikel e Breizh, nemet diforc'h dioutañ war un dro. Goude lavarout kement-se avat e ranker lavarout gant nerzh ez a ar Feiz kalz en tu-hont d'an emzoug trivliadel ha mibilus - bezit seven, jentil, servijus - a zo erbedet hiziv evel merk-dianaout ar c'hristen gant ar gloer a hiziv. E gwirionez ne oar ket mui ar gristenion e Breizh evel er C'hornog dre vras petra eo bezañ kristen na perak bezañ kristen o vezañ ma n'eo ket bet meizet na krouet ganto talvoudoù ar bed arnevez a zegemeront hiziv hep bezañ gouest da vat d'o c'hlenkañ en ur meizadur kravezel eus ar bed. Kentañ dlead ar gristenion e Breizh ez eo eta ren ur striv a bred-er evit burutellañ ar sevenadur digravezel a hiziv ha termeniñ doare an dispac'h o devo da gas da benn en amzer-da-zont evel kristenion end-eeun.

Ar pezh a gavan tregasus evit dazont ar gristeniezh en hor bro ez eo 'skizofrenegezh' ('bredranniezh ar gristenion enouestlet er politikerezh breizhat, a implij, evit dezrannañ ur saviad politikel pennaennoù ha na gavont o ster nemet e framm ur brederouriezh estren ouzh o Feiz, a gemer da vistri soñjal meizourion enebet krenn ouzh ar gristeniezh ha perzh en un istor en deus skarzhet ar bed eus pep nevetted ha pep krav-ezelezh hag, erfin, a sent ouzh emsavioù diazezet war ur bedvezadur e dislavar gant o c'hredenn don int o unan.

Ne gav ket din eta o deus ar gristenion e Breiz da goll amzer en ur stourm yezhelour, rannvroelour ha kleizelour marksat ha n'en dije da bal nemet brudañ rannyezhoù o vont da get hag ur stourm etre renkadoù e-lec'h na vint, n'eus forzh penaos, nemet ambrougerion dic'halloud e deiz an trec'h, chadennet ouzh mistri o devo dibradet war o zron. Al labour mallusañ o deus da seveniñ er mare-mañ - ha soñjent ivez pegen distank ez int - ezeo ober o seizh gwellañ evit krouiñ un danvez framm kristen a c'hello talvezout da adsevel ar Feiz el ledenez-mañ. Ezhomm he deus ur vroad a frammoù liesseurt ; arnodou e sell d'o sevel a zo bet kaset da benn, dreist-holl avat war dachenn an deskadurezh pe ar politikerezh ; dibleustr avat e chom tachennoù arall ha poent bras eo d'ar gristenion a soñj e gwirionez n'eus silvidigezh ebet er-maez eus ar Feiz kristen kregiñ ^{da} seveniñ ar gefridi a zegouezh dezho.

=====

Y.O.

DAVET AR PRAD DU

gant Youenn TROAL (Kendalc'h)

E-doug an nijadenn hir-se n'eus ket bet roet kalz a zisplegadurioù deomp da lavarout a-us da be gorn eus ar bed edomp, pe eur e'oa, pegen pell e oamp eus dibenn ar veaj. Div pe deir gwech ez eus bet goulennet diganeomp skoulmañ ar gouriz rak edo ar c'harr-nij o vont tre en ur barrad amzer fall. Hej a vez neuze gant al labous pa droc'h evel-se ur gorventenn louet ha teñval. Ha setu poent merenn : dindan fri pep unan e leder eizh traig ben-nak e-barzh ur plad hir melen, silzig ruz, tomatèz, fav, kig gant avaloù-douar, abrikez, keus, un tammig bara segal, amann, kafe pe de evit klozañ.

Dek eur bennak eo pa ziskennomp e Frankfurt. Nag e-c'hon aerborzh ar gêr alaman-se. Ret eo din sevel ur bilhed all. Kaset on eus ur burev d'egile, gant nebeut tre a c'halle evit ober war va zro. Ha c'hwenn zo em loeroù o klask niverenn ar riboul da vont er-maez. Frapad kentañ : Pariz ; eil frapad : Frankfurt-New-York. Ne chomer ket da ruzañ ; buan e tibrader. D'ur mare, en hon tu kleiz, er pellder, e lost gweñ arc'hantek oc'h en em zistagañ war an oabl glas glan, e kerzh ur c'harr-nij all war an hev-elep tu ha ni. Da drizek eur, ar re a zo arc'hant dezho - betek henn n'eus ket kalz a dud en dienez epre an neñv - hag an douar - a c'hall prenañ evajoù, alkolioù, butun cheuc'h, danvezioù-fichañ... Mont a ra fonnus ar boutailhoù hag ar pakadoù a-ziwar ar garrigellig. Un Indezad bihan a zispourbell e zaoulagad dirak kartoù tri c'hoarier hag a-daol-trumm e krog enno ha d'an daoulamm betek e blas e penn pellañ ar c'harr-nij.

Da bemzek eur ez eus da zibab etre un aval hag ur vananezenn. Da seitek eur nemet kard, koan : kilhevardon, chug frouezh, te. An Indezadig a denn e deod d'an dud... Dalc'hmat ez eus monedone war-du ar privezioù, e lost ar c'harr-nij. E Pariz eo naontek eur nemet ugent pa adkavomp an douar er Stadoù-Unanet. Avelioù a-benn a zo pennabeg da un eur dale. An dreizhidi, en o soñj mont larkoc'h, a zo dastumet, evel e kement aerborzh zo, en ur sal-ged ha

n'eus aotre ebet da vont er-maez anezhi.

Trede frapad : New-York-Guyaquil. An taol-mañ e klever spagnoleg hag e teu war well pennoù melen ; en em gavout a ran muioc'h er gêr. Muioc'h a livioù ; n'eo ket mui ken cheuc'h an dilhad. Pell amzer e pado c'hoazh an deiz. An heol en tu dehoù ; en tu kleiz runelloù koumoul gwenn kam, evel kaol dienn, o c'hournijal en ur bed glas mik. E-pad ur pennad ez eus tu da welout an douar, douar draill et, marellet gant parkeier melen ha glas, ha mor oc'h en em silañ er plegoù. Marteze Bahamaz, Kouba pe bBuerto-Rico Nebeut tre a zisplegadurioù hag, ouzhpenn-se, alies e Saoz neg hag alamaneg nemetken. Ur gwaz a lenn ur gazetenn e lizherennoù hebraek. Ha dav adarre ouzh taol ! Daou ostiz hag un ostizez a astenn ur plad hir gant ur golo : kaolfleur bihan gant saladenn, tammoù eog, lipouserezh gant riz ha karotez, keus, amann, ur voullig vara, ur hirgarr-ezennig a vara segal. Hir e kavan an amzer. Deuet eo an noz... Darn en em ro da gousket. Lutigoù ar c'hostezioù a varn an eil war-lerc'h egile. Met n'eo ket echu c'hoazh kargañ ar c'hof : chom a ra c'hoazh un dra bennak da lonkañ. En taol-mañ e chom ar pladad kig eus va dilerc'h ; a-walc'h gant kilhevardon ha drailhennoù orañjez. Naontek eur eo gant bizioù orolaj Guyaquil, ur gêr vras eus Republik Ekwador. Amañ eo paouroc'h ar stal ; n'eus lec'h ebet evit gedal. Goulemm a reer diganimp lezel ar pakadoù war dreuzoù ar sal-ged n'eus nemetñ hag ez eomp d'en em veskañ gant tud all.

Pevare frapad : Guyaquil-Lima. Un eur hanter nijadenn Rouez eo deuet an dreizhidi da vezañ. Mall eo gwelout penn an Imram-se. Nebeut ha nebeut e koazh ar fraoñv ; ne chom mui nemet ur c'hwitelladenn difraezh, damheñvel ouzh hini an aezhenn o flistrañ. Santout a reer an ardivink oc'h izelaat ingal, bravik, o tigreskiñ e dizh tamm ha tamm. Un dra bennak a chom c'hoazh d'ober evel bepred : reiñ da bep hini un torch beñv soubet e dour eukaliptuz, da freskaat ha da naetaat dremm ha daouarn.

Ouzhpenn unnek eur noz eo pa dremenan dirak matout-erion nijva Jorj Chavez, Lima. Gant va sac'hadou, gant va arc'hant, diaester ebet. Ur c'harrig-samm am c'has betek kreiz-kêr. E goueled ur safar an diaoul ec'h en em silan etre lifserioù mouest ar gwele. Lima a zo ganti an hevelep cholori noz ha pemp bloaz zo. Roc'hadennoù

skrijus kefluskerioù ar c'hirri-samm hag ar c'hirri-boutin kozh-Noe, youc'hadennoù diehan ar c'hornioù-boud, skrignadennoù ar starderezioù ; re skuizh on evit kousket mort ; hag, ouzhpenn-se, ar c'hren-douar ; div wech henn santan e-kerzh an nozvezh kentañ. Ur spouron diehan a zo krog e bouzelloù al lodenn vrasañ eus annezidi Lima hag he zrowardroioù. Rak start eo bet barrad ar yaou 3 a viz Here 1974, QUEST-FRANCE a gomze eus tri-ugent den lazhet. E-kreiz Lima e weler atredoù berniet amañ hag a-hont, a-hed hag e korn ar straedoù, ur savadur diskornet bennak, ur voger kouezhet... Gwashoc'h eo bet e lec'hioù all ; bemdez, koulz lavaret e kren an douar abaoe.

Ne dremenin ket eizhtez e Lima. Da sul edon o kenlidañ an oferenn gant person ar "Recoleta". Hag ur vaouez e traoñ an iliz ha leuskel ur youc'hadenn ! Ho pije gwelet ar strollad fideled, a-unan, oc'h en em deurel war an norioù. Sederaet, avat, gant an Tad Alfred, e chomjont da beureshufiñ an oferenn. Amzer am eus bet da vale dre straedoù kêr : netra nevez evit va daoulagad din-me. Nemet un enskrivadur isklis bennak : "Anhipied er-maez eus Ferou !" "Indios sucies !" ("Indianed lous !") Ar wech-mañ on aet evit an eil gwech da welout "bariadaoù". Displeget em eus meur a wech petra int. Ma, puchit war ul leur-zi douar ha lakait kichen ha kichen boestoù-sukr goullo, roget ha diroget, freuzet ha difreuzet, betek goleñ al leurenn boultrennek-se. Ho po ket c'hoazh kroget santout petra eo un doare ken euzhus da vevañ, d'en em lojañ. Ma vije c'hoazh ur blantenn ! Ma vije ur barrad glav ur wech an amzer da zistanañ ! Mann, poultrenn ha lastez nemetken ! Hag heol diehan ha dizamant ! Un dizamant a lezenn a zleje bezañ ivez evit lakaat harz da greskidigezh ar braskerioù. En em c'houlenn a ran evelato ha ne vefe ket krisoc'h eget ar "barriadaoù" e Lima : ar "c'hcallejones" an hini e vefe, neuze. Graet em eus ur gwel da unan en taol-mañ. Ijinit, e-kreiz ur strollad tiez bevennet gant peder straed e stumm ur c'harrez, ur c'harter diwelus. Rak a-dreñv ar savadurioù a c'hall an holl parañ warno o daoulagad amañ al lojenned-se, al lastez-tieze-se a ranker tremen dre un nor vras evit gouzout emaint aze. Ezhomm ebet da lav-

arout emaint an eil war-c'horre egile, stag-ha-stag gant ur straedig teñval o vont eus an eil penn d'egile. Evit c'hoari n'o deus ar vugale nemet al lec'h flaerius-se. Pep tiegezh en em guzh hag en em gloz e-giz ma c'hall. Un duellenn nemetken en ur penn, un toull lastez nemetken ha babiged diouzh an druilh. Ha koulskoude, en ur c'hustod, stok ouzh an nor-dal, ur Werc'hez e-kreiz bleuniou ha gouloù !

Evit echuiñ un draig c'hoazh a-zivout ar gêrbenn vougus-se, sur-mat unan eus ar c'hêrioù ar muiañ saotret er bed. Ar straedoù n'int nemet ur vogedenn: kement a dangirri ha n'eus anezho nemet atredoù ! Deiz ha noz ez eo flaerius an aer : c'hwezh an tireoul devet. Nepred ur mouchig-avel. Morse ur berad glav. Dre chañs n'eus ket c'hoazh labouradegoù a-vil-vern. Amañ, kement ha ma c'hallan e ran bruderezh a-enep Lima, evit lakaat ar re yaouank da chom en o menezioù glas e-lec'h maz eus, daoust da bep tra, un tamm muoc'h eget poul-trenn da lonkañ.

(Da gender c'h e l)

+++++

K e n s k r i v e r e z h

"Degouezhet ganen niverenn Genver. Ha sede m'emañ adarre o kas kemmañ un dra bennak er skritur. Pegoulz eo e vezo echu gant ar stultennoù ?

Diskleriañ a rit ervat an amkanioù gwir a guzher a-drek ar van da welaat an doare-skrivañ : tabutoù a dudennou ha tra ken peogwir n'eus hini ebet hag a ginnigfe ur c'hantreizhadur bennak brezhon d'e emzalc'h politikel. Tonket eo dimp moarvat mont da heul ha mont war-lerc'h hon amezeion a'r reter ; n'eo pep tuad breizhat nemet ur rann pe un adramm eus un tuad gall hag o stagañ da vennozioù estren.

Daoust ha diwan a ray deiz pe zeiz ur c'helennadur dimp, ur c'heal eus an den, eus e donkadur, eus an doare d'e varrekaat da seveniñ an tonkadur-se ? Eno eo emañ an dalc'h.

Mar diazezer stourm an Emsav war isted ar stad armerzhel e Breizh petra ' raimp en deiz ma teuy da vout kevatal ? Ha daoust hag-eñ n'eo ket kevatal a-benn bremañ stad armerzhel pobl Vreizh gant hini pobl Frañs ? Mar n'hon eus da c'houlenn nemet kement ha ma vez goulennet gant tud Vro-Frañs, da betra e talv bout breizhat ha mennout chom ?

Ar stek eo ez omp-ni Breizhiz, unveziadoù diforc'h e korf ar vroad c'hall. Ur gelemadurezh hollzenel a zlefe diskleriañ penaos ez eo an unveziadegezh retvezh ar bezañ : n'eus ket tu da vezañ un dervenn hag ur binenn war un dro, n'eus ket tu da vezañ T. Olier ha G. Ewan war un dro ; setu holl. An diforc'h, an unveziadegezh a zo dirannadus diouzh ar bezañ. Ha tremen eus ar vrezhonelezh d'ar c'hallelezh a zo mervel evel brezhon, a zo mervel evel Den. Rak n'eo ket ar c'hoarzhin hepken eo a zo perzh an den,

an emziforc'hañ a zo ivez. Ar skoilh eo, evel reizh, e rankomp bevañ ha n'eo ket bezañ hepken, e-kreiz ur gevredigezh, gant skoazell ur gevredigezh, en ur eskemmañ gant ur gevredigezh ; hag e vez amparet, dre dermenadur, ur gevredigezh gant tud , tud hepken, tud hag a zo enno un teskad heñvelderioù, tud hag a zinac'h buzadoù an ober kevredigezhel ouzh ar re ziforc'h, ouzh ar re, da vihanañ, a'z eus enno diforc'hioù dizegemeradus. Ha merk ur gevredigezh, merk ur vroad, eo an dinac'h-se. Dinac'h bout gall zo evidomp-ni ar brouenn ez omp ur gevredigezh diforc'h hag hon eus ar gwir da vezañ, da vevañ er gevredigezh-se. Eno eo emañ di azez hon gwir da vezañ Breizhiz.

Ar skoilh gant ar Stad c'hall eo ne c'hall lenn digant he sujidi diforc'h denel all ebet estreget bout suj d'he lezennoù ; ha hi eo a lavar piv a zo suj. Kavout a ra din ez eus e Breiz ur c'heal rikoc'h eus ar vroadlegezh, diazezet war ar gerentiezh ouennel daoust ma ouzomp erva (keleñnet eo bet dimp) n'eus gouenn c'hlan ebet ken. Ne c'hall ket ur mreiz brezhon degemer e ve Brezhoned du pe velen, da skouer, na, zoken, it lian pe alaman. Re dechet e vijemp marteze da welout er yezh, en arver ar yezh, azon pouezusad ar vroadelezh ; an hini anatañ eo ; n'eo ket, avañ an hini nemetañ. Ar re a zo bet lakaet warno gant kerzh ha heg an istor azonou disheñvel evel yezh an estren a c'hall, dre zeskiñ ar yezh vrezhonek diskouez o mennout da vout enkorfet er vroad ; a walc'h e vezo, marteze ; n'eo ket diogel..."

E.G.

=====

ADDISPLEG D'AR PENNAD WAR-LERC'H

Moulañ a reomp amañ da heul ur c'hrennad brezhonek aozet gant Paol Kalvez diwar ur pennad embannet hevlene e-barzh doare gallek kelaouenn damkanel "Kevre Komunourion Yougoslavia" a zo he zalbenn "Questions actuelles du socialisme".

Tro hon eus bet dija da embann pennadoù diwar-benn emdroadur armerzhel kevredigezhel ar riez-hont. En dro-mañ e voulomp ur skrid a-zivout kudenn an dampredoù etre an Iliz hag ar Stad e Yougoslavia (notit mat, avañ, e kavot er pennad-mañ savboent kefridiel ar galloud er vro-hont) gant an dezo da glask sklaeraat saviad an Iliz e riezou komunour ar Reter.

N'hon eus ket titouroù resis diwar-benn ar saviad-se e gwirionez nemet un nebeut brudoù a zo deuet betek ennomp dre ar Wask. Klevet hon eus lavarout avañ e oa yac'hoc'h an Iliz, en ur stumm, e-barzh riezou komunour zo eus ar Reter eget er C'hornog frankizour ; leun e vefe ar c'hloerdiou (ar re a zo aotreet, bepred) ha gredus ar gloareged.

Maz eo gwir kement-se e c'hell bezañ diskleriet e meur a zoare. lavarout a c'heller, da gentañ, ez eo douget ar Gristenion, en un endro gelenus, d'en em strolañ kenetrezo ha d'en em stagañ ouzh o Feiz hengounel hep koll o nerzh hag o gred e-barzh imbours'hadennoù modernour didalvez. A-hend-all en ur renad dizous dre gefridi e ro ar Feiz d'ar re yaouank un tu da nagenat ha da zaeañ ar galloud diazezet, erfin, e-barzh riezou zo en em vata ar gristenion eus un doare damantiz a-berzh ar pennadurezhioù komunour en abeg d'an tennerioù diabarzh a zo anadet er gevredigezh komunour end-eeun.

E devoud n'eo ket bet dilamet er c'hevredigezhioù-se an eneberezhioù politikel a zlee bezañ tennet kuit gant donedigezh ar sokialouriezh. War a seblant, kaer a zo bet ober, n'eus ket bet tu da zaspazhañ ar galloud politikel gant reizh a-walc'h e diabarzh ar Stad pe e pazennoù liesseurt ar gevredigezh. Renkadouren nevez, 'diazezet', a vir ar galloud evito o unan hag evel ma vever er broioù-se dindan renad an unstrolad n'eus chañs ebet d'ar re a zo forc'het diouzh ar galloud hag an atebegzhioù politikel da dapout krog

un deiz bennak er stur d'eo zro.

En un doare souezhus a-walc'h ez eo bet eztaolet tennderioù diabarzh ar c'hevredigezhioù komunour gant kefredourion gommour ar riezou-hont end-eeun. E devoud ez embann ar gefredourion-se ez int feal d'ar reizhkredenn varksat ; hag en anv ar reizhkredenn-se eo e tagont dalc'herion ar galloud. Nevez zo, da skouer, ez eus bet harzet kefredourion e Yougoslavia ; ne oa ket ar wech kentañ avat ; adal ar bloavezhioù pemont e oa bet aozet ur prosez a-enep d'ar prederour marksat Djilas a damalle da renerion ar Strollad komunour bezañ aet d'ur renkad-ren nevez.

Bezot pe vezot, kavout a ra deomp he deus an Iliz tennet mad eus ar c'henstokou-se - ha re all, evel just - e diabarzh ar Stad yougoslavat, betek ur poent zo, da vihanañ. Re zister eo levezon an Iliz er vro-hont, kollet ganti pep galloud armerzhel ha politikel, evit tregasiñ al levierion ; deuet mat eo d'ar re-se, er c'hontrol, gouzañvusted ha lealouriezh ar gristenion ha na deurvezont mui kemer perzh en istor, da lavarout eo, er redadeg war-du ar galloud ha n'eo aotreet nemet da izili ar Strollad komunour. Ne c'hell ket ar gristenion bezañ heretiked ar varksourion na, dre se, kenstrivañ ganto ha reiñ trubuilh d'ar re a zo e penn ar Stad : n'eus mar ebet e vo deuet gwell ur c'hristen dibolitikel eget ur c'homunour nagenmour o reiñ kentelioù a reizhkredennegezh d'eo levierion.

An emdroadur nevez-se e-barzh kevredigezhioù komunour zo a c'hell lezel un tamm peoc'h d'ar gristenion er mare-mañ er broioù-se hogen arabat eo disoñjal evit keloù se ez eo enket ar gristenion a-hont en ur geto a c'hell mont da get a-grenn deiz pe zeiz adal ma n'en deus ar geto-se galloud politikel nag armerzhel ebet. Er c'hevredigezh-se e tleer diskuliañ pilpouerezeh ar pennad a venegomp e sigur kemedadur madoù an eskibion e Yougoslavia ; n'eo ket d'ar Stad hogen da gumuniezeh ar gristenion eo e tleent bezañ daskoret ; o c'henglad e oa ar madoù-se, lakaet n'oa ket an eskibion gouest d'ober un implij mat anezho. Mat eo gouzout evelkent n'eo deus ket graet ar gomunourion, en dro-mañ, kalz gwashoc'h eget bourc'hizion dispac'h gall 1789. Nemet kement-se n'eo ket un digarez ; n'eus ket a frankiz soñjal hep gwir da sevel ur gevredigezh a roy

D A R E M P R E D O U E T R E A R S T A D
H A G A N I L I Z K A T O L I K E
Y O U G O S L A V I A

"Ur vro arnod eo Yougoslavia evit ar gevredadouriezh ha, peurgetket, evit an dar-empredoù etre ar Stad hag an Ilizoù.

An Iliz katolik, daoust ma n'eo ket an hini niverusañ, a zo an hini vuhezekañ dre'n arbenn maz eo an hini frammetañ, an hini hollvroekañ hag an hini hollvedekañ dre hec'h aozadurioù ha dreist-holl dre ar galloud he deus d'en em azasaat ouzh pep degouezh hep nac'hañ netra eus he c'hefridi er bed.

Diwar hevelep birvidigezh ez eus savet kenstokadennoù etre ar Stad hag hi.

Er bloavezhioù diwezhañ he deus klasket ar Stad, diouzh he zu, kenlabourat gant an Iliz, hag an Iliz, hi, en em azasaat ouzh ar renad sokialour ; ar Strollad komunour, avat, e-keit-se, a gendalc'he da zifenn an dizoueadegezh. Ar pezh a ziskouez e c'hell an Iliz katolik kenvevañ - ne lavaromp ket "kedvevañ" - gant ur Stad sokialour. Diaesterioù a rank c'hoarvezout, avat, en arbenn a frammadurioù hag a finvezhioù pep hini anezho. Da skouer, paz eo bet embannet bonreizh nevez Yougoslavia, e klaskas an Iliz katolik kadarnaat hag astenn he frankizioù, peurgent, war dachenn an deskadurezh. Hervezi e rank ur c'hristen en em ren en un doare kristen war bep tachenn eus ar vuhez hag eus ar gevredigezh ha n'eo ket hepken en ilizoù pe e par ar marv.

Diskouez a rae e kement-se hec'h hollzegezh ; ken hollzenek hag hi, avat, e fell d'ar Stad sokialour bezañ ; setu perak e pad an eneberezh etrezo.

Treuzvarc'hadoù ez eus bet, koulskoude, etre an daou aozadur war ar c'hrafoù ma oa tu d'en em glevout

Diouzh daou brantad e c'hell bezañ studiet an darempredoù etre ar Stad hag an Iliz katolik e Yougoslavia (ne lavaromp ket etre ar bihanniveroù oc'h oberiañ enno).

PRANTAD KENTAÑ : KENSTOKOU

Abaoe embannidigezh ar vonreizh betek 1960 ez eus bet muioc'h a eneberezh eget a emgleverezh Hengounel hag enep-komunour e tiskoueze an Iliz katolik bezañ ha stourm a rae ouzh ar Stad. Nac'hañ a rae an eskibion harpañ treuzfurmidigezh ar gevredigezh kevalaour en ur gevredigezh sokialour. Ar Stad a glaskas o rediañ da genlabourat ha sellet e voe ar redi-se evel un heskinerezh a-enep d'ar gravez, - ar pezh ne oa ket.

Kollet ganto ar veli e klaskas ensavioù an Iliz hec'h adkavout, n'eo ket e framm ar Stad nevez met e framm ar c'hilistourm renet gant strolladoù kevalaourion, ar pezh a redias ar mererezh d'o heskinañ. E 1945, en ul lizher savet evit ar gristenion, e kunujennas an arc'heskob Stepinac, n'eo ket enebourion ar vro hag ar bobl, evel m'edo ar Stad en gortoz e raje, hogen galoud nevez ar bobl en doa dieubet ar vro. Gouzout a ran e oa kalz beleion ha na oant ket a-du gant an eskibion. Ha padal eo neuze en em savas bagadoù "oustachi" nevez, anvet "krizari" ("krozazidi") renet gant beleion ha liamet ouzh an eskibion.

Ur brezel etre renkadoù e oa ar brezel etre an Iliz katolik hag ar Stad tra ma oa ur brezel etre aozadurioù enebet o finvezhioù kenetrezo, ivez. "En em zinac'hañ a rafe an Iliz mar dinac'hfe he diazezoù... Ne c'hellomp ket asantiñ da adaoz ar glad dre maz eo diazezet war ar c'heal e rank an douaroù bezañ e piaou

nemetañ ar re o gounez..." (Lizher an eskibion d'ar Marichal Tito e 1945) Un digarez ne oa ken, an arbenn gwirion o vezañ e oa bet roet d'ar bobl atantoù bras an eskibion.

Torret e voe an darempredoù gant ar Pab e 1952. Hemañ a respontas oc'h envel an arc'heskob Stepinac da gardinal, ar pezh a voe sellet evel un dagadenn hag un astenn eus ar brezel er par etrevroadel. Anat eo ne c'hell Stad Demokratel ebet lezel un Iliz da spontañ an dud gant gourdroz poanioù an ifern en abeg d'o memmozioù politikel pe da dennañ o c'hargoù digant ar veleion ha n'o doa graet fazi ebet nemet lavarout e c'hell ur c'hristen karout Yougoslavia nevez ha bezañ ur sokialour oberiant. Dav eo d'an eskibion kompren ez eo kemmet ar bed e Yougoslavia. Ne c'heller ket reiñ en-dro d'an Iliz hec'h atantoù bras beñ rannet etre ar gouerion, he ziez-bank hag he greantioù perc'hennet ha meret bremañ gant ar Stad, he ziez-embahn ha -moulañ deuet da vezañ glad ar bobl ha meret gant kuzulioù micherourion. Ne c'heller ket anzav d'an Iliz katolik ar gwir he doa gwechall da sevel raklunioù deskadurezh untuek, da rediañ an dud da eurediñ en ilizoù ha da lakaat badeziñ o bugale; rak henn ober a vefe ober gaou ouzh an amgristenion.

Komprenet e oa bet kement-se gant un darn vras eus ar veleion, brogarourion anezho, hag a oa strollet e-barzh kevredigezhioù micher.

Eskibion zo ivez a asantas da gemer perzh e bodadegoù ur c'hengor daou-hanter bodet gant ar Stadrenerezh e 1953, en o zouez arc'heskob Beograd, kadoriad an eskibion ad interim.

Hogen setu ar pezh a skrivas D. Tardini, sekretour-stad ar Sez Santel : "Klevet ez eus bet amañ dre ar c'helaouennoù hag ar skingomz e oa bet bodet gant Tito eskibion gatolik, c'hwi en o zouez, a-benn en em glevout war ur "modus

vivendi". Anavezout a rit, moarvat, reolennoù gwir kanonek an Iliz war an divoud-se. Padal e tegasomp da soñj deoc'h ha d'an eskibion all ne c'hell ket an eskibion en ur riez asantiñ da netra hep aotre ar Pab. Mont a-enep d'ar reolennoù a vefe ober gaou ouzh mad an Iliz hag ouzh mad an eneoù..."

E I L P R A N T A D : T R E U Z V A R C ' H A D C

Abaoe 1960 e welomp ar Stad sokialour hag an Iliz katolik o klask kenvevañ ha, zoken, skoulmañ emglevioù. E 1960 e ro an eskibion d'al levierion ur c'hounskrid da studiañ. Etre 1964 ha 1966 ez eus kendivizoù etre Beograd ha Vatikano. Ar frouezh eus kement-se eo youl-vat hag anzavadennoù a bep tu. An Iliz katolik a zegemer saviad nevez ar gevredigezh e Yougoslavia diazezet maz eo war ur vonreizha aotre ar frankiz d'an aozadurioù kravezel (kv. "Dezvad ar c'humuniezhoù relijiel") Un Iliz dieub en ur Stad dieub. Ar Stad a anzav e c'hell ar Pab ren war an Iliz e Yougoslavia tra ma c'houlenn an Iliz digant ar veleion oberiañ hepken war dachenn ar gravez. Etre ar Pab hag al levierion e rank ar fazioù er c'heñver-mañ bezañ reizhet.

Ar Stad a warezo ar gwir en deus pep den da vevañ diouzh e gravez. Ma sav kudennoù war ar c'hraf-mañ ez eo d'ar Pab ha d'al levierion o diskoulmañ.

Anat eo avat - evit klozañ - n'eus anv amañ nemet eus treuzvarc'hadoù hag e vir a r Stad sokialour hag an Iliz katolik o finvezhioù hag o frammoù a-ziforc'h. War ur poent, avat, emaint a-unvan : diskoulmañ o c'hudennoù dre gendivizoù."

D A R V O U D O U D R E A R B E D

Klask a rin komz eus tri rumm darvoudoù hag ober un tamm plaenadur dezho, evit tennañ ur gentel bennak o klotañ gant degouezh Breizh.

Meneg a rin, da gentañ, eus drouziwezh ar Su-Vietnam. Didalvez eo, d'hor soñj, tamall ur gostezenn pe eben da vezañ kiriek da adkrog an emgannoù ; kentoc'h e vefe da dermeniñ, a gav deomp, doare ar brezel a zo o reuziañ ar vro-hont abaoe un tregont vloaz bennak, hag a zo o vont d'echuiñ bremañ goude bezañ bet lakaet da badout - en aner - gant emell an Amerikaned er bloavezhioù c'hwegont.

Ar pezh a sko spered an arvester e degouezh ar brezel-mañ ez eo touellerezh ar ger "demokratelezh" pe "frankiz" pe ar gwir da emdonkañ a zo bet implijet gant an div gostezenn evit reizhabegañ o emgann. En daou du n'he deus bet ar boblañs tro ebet biskoazh da zibab he flanedenn ; pep tra a zo bet divizet gant ar brezel hag al luoaz. Enouestladur ar wazed en arme-mañ arme ne dalvez netra peogwir ez eo bet soudardet an holl dre heg (kig-kanol ez eo bet ar boblañs en hanternoz) pe dre ret (evit tec'hout diouzh an dienez er c'hreisteiz, lakaomp) ; en un tu e staged ar vlenierion girri-arsailh ouzh o ijinenoù, en hanternoz ; hogen renad ar Su a oa ur renad a gerreizh hag a gampoù-bac'h er c'hreisteiz (hogen Petra gortoz estreget se en ur riez a oa e brezel abaoe meur a zek vloaz?) A-hend-all ne c'heller ket lavarout ez eo bet degemeret lu ar Viet-Cong gant entan ha jourdoul da boblañs an tiriegezhioù nevez 'dieubet' gantañ. A bep tu eta e ren an diktatouriezh politikel, luel ha kerreizhel.

Marteze, evelkent, e oa aesoc'h bevañ er c'hreisteiz met gwall gempouezet e oa an aesentez-se gant breinadurezh ar renad ; e-lec'h emañ an arc'hant hag an armerzh en o roll, dreist-holl e-barzh riezioù isdiorreet pe nevez diorreet e teu war-c'horre ur c'hendere rastellerion ha korvoerion nebeut e chal gant kenvad ar vroad ha dezhañ ur pouez re vras e buhez ar stad ; seurt kendere, a-hend-all, n'eo ket gouest da awenañ na da ren ur bobl.

Moarvat o deus gallet kumuniezhoù kristen ar Su en em vataat eus ur rezid speredel zo e skeud ar

frankizouriezh armerzhel ; hogen, dres ivez, ez eo bet ar frankizouriezh-se mammenn a zizunvaniezh e-touez pobl Su Vietnam ; hag hi rannet e sektennoù stank n'oa ket gouest Su VietNam da zifenn un uhelvennad politikel ha speredel unvan (hag, a-hend-all, peseurt talvoud speredel a c'hell bezañ miret pa ranker ober gant ar feulster hag ar galloud?)

Edon o komz eus kumuniezhoù katolik ar Su Viet-Nam. Tamallet ez eus bet dezho bezañ hengounelour ha me 'oar-me. E gwirionez emaint heñvel a-walc'h ouzh hor c'humuniezhoù relijiel diwar ar maez e Breizh en naontekvet kantved. Anat eo avat ez eo tonket dezho steuziañ en ur bed ijinerezh, dreist-holl ijinerezh gant marksourion o deus diskouezet a-walc'h e oant pred-eriet dreist-holl ivez gant an efedusted politikel hag armerzhel e kement lec'h m'o deus kemeret ar galloud betek hiziv. Ar re-mañ, n'eus forzh penaos, ne welont netra en tu-hont d'an talvoudoù denel bedel goude ma akedfent da ziazezañ ur gevatalded hag ur reizhded zo e-touez ar pobloù o deus damesaet.

Ne welan ket eta petra a c'hello ober ar c'humuniezhoù-se evit mirout o frankiz hag o zalvoudoù relijiel. N'emaomp ket mui en un amzer ma c'helle ar bihanniveroù kravezel divroañ ha krouiñ broioù nevez evel m'eo c'hoarvezet en Amerika an hanternoz ergentaou. Hogen lakaet evije tu dezho divroañ ne c'hellje ar stolloù-se mirout o c'hredenn nemet asantiñ a rafent da zerc'hel d'un doare-bevañ plouezet er-maez eus ar sevenadur greantel arnevez evel m'eo bet krouet gant ar gevalaourion vourc'hiz eilet gant o eilerion varksat.

PORTUGAL

Deurus eo an darvoudoù nevez c'hoarvezet er Portugal dre maz int enebet krenn ouzh ouzh ar re a zo c'hoarvezet daou vloaz zo er Chile ; an diforc'h-se hon eus merket dija : al lu en deus kaset d'an traoñ ar renad mirelour er Portugal en deus adsavet anezhañ er Chile.

Kement-se a ro tro deomp da brederiañ diwar-benn roll an arme en ur vro. Ar brud a roer da houmañ eo bezañ mirourez an urzh. Moarvat an urzh-se n'eo ket,

dre ret, an urzh hengounel diazezet a bell zo. En Amerika ar Su, zoken, n'eus ket kilstourmerion bepred eus an holl soudarded o deus kemeret ar galloud eno ; a-wechoù ez int a-du gant un doare sokialouriezh hag araog-elouriezh, kar a-walc'h da hini riezoù arabek zo (gwir eo ne vez termenet ar c'hilstourmerez, a-benn ar fin, nemet gant strolladoù komunour an trede etrevroadelenn en o c'heñver-int o unan).

Ouzh daou zevoud em eus taolet evezh e ser darvoudoù Portugal. Da gentañ, an aes m'eo kouezhet en e boull ar renad kozh. E gwirionez n'eo bet hemañ difennet gant den, na gant an dud e karg na gant ar werin, na petra! Ret eo krediñ eta n'en devoa ar renad-mañ uhelvennad ebet da ginnig d'ar re en harpe, dre ret, emichañs, na d'ar werin ha n'oa ket nec'het gantañ. Setu ur riez eta he deus drouziviet ar pep brasañ eus he c'horvoder broadel evit difenn un implaeriezh hag a oa ur samm eviti, a-benn saveteiñ ur "bennaenn", ret eo krediñ. N'he deus graet ar stad nemet melestrañ ur peadra hep klask e lakaat da greskiñ na kinnig d'ar bobl ur pal bennak da dizhout. Marteze ez eo bet kiriec d'ar morzherezh-se ar meizadur 'diasavel' eus ar Stad a oa gant ar re a oa e penn anezhi.

Daoust d'ar pezh a zo bet diogelet a-wechoù ne oa ket ar renad portugalat kozh ur renad faskour er ster strizh, - unan hengounelour a c'hiz kozh, ne lavararan ket. Ar Stad faskour hag hi oc'h en em harpañ war ar gevalaourion vroadel, a implij anezho evit kreskiñ galloud armerzhel ha politikel ar vro. A-benn reiñ lusk d'ar boblañs ez arver ur gealiadurezh bennak (gouennelouriezh en Alamagn ha stadelouriezh en Italia, etre an daou vrezel) (1) Moarvat e konte renerion gozh ar Portugal war an Iliz evit pourchas un ideologiezh a-du gant o renad d'ar boblañs. Hogen emañ an Iliz e Portugal pe hengounel (da lavarout eo, en desped d'ar pezh a asurer a-wechoù, dibolitikel) pe oc'h emdreiñ ivez, evel e meur a vro all, war-du un araogelouriezh zo, - elese, ne c'helle pourchas skor ebet d'ar renad portugalat kozh. Afer hor boa eta ouzh ur Stad rik diazezet

(1) Kement-se n'eo ket arbennik d'ar faskouriezh. Riezoù komunour an trede etrevroadelenn ha Sina ivez a ra gant ur gealiadurezh evit kas an dud war-raok hag o broudañ d'al labour.

er c'houmoul ha skoret hepken, moarvat, gant un nebeudig mistri armerzh ha n'o devoa darempred ebet gant ar boblañs, emichañs. Netra souezhus e vije bet diskaret ken prim se ur renad a hañvale a-ziagent bezañ kreñv meurbet.

Diwar-benn roll al lu bremañ.

Ne gredan ket e c'heller, er mare-mañ, komz eus un dispac'h demokratel er Portugal, muioc'h eget er renadoù emanvet sokialour en Europa ar Reter pe e nouspet riez en Afrika. Ur gwir zispac'h demokratel a c'houlakafe ur boblañs desket ha politikelaet a bell zo hag o tibab hec'h hent dre aozadurioù ezveret diouti ha reolet penn-da-benn ganti hep emell ebet eus ar Stad. Petra hon eus er Portugal avat ? Diouzh un tu ur boblañs dizesk, didaer he mennozioù ha dibolitikel, avat, dre vras ; diouzh un tu all, strolloù politikel a bep seurt hag urzhiet mat a-wechoù, evel ar PCP pe "Luskad an nerzhoù-lu" - a zo dezhañ, ouzhpenn, ar galloud gwirion, dre natur, koulz lavaret, nemet anezho holl bihaniveroù e-kreiz ar boblañs ha dic'halloud ivez en abeg da se paneve gwarez an arme end-eeun.

Dres, pezh a zo da evezhiañ ez eo penaos n'o deus ket ofisourion yaouank lu Portugal harpet n'eus forzh peseurt strollad ; betek gortoz o deus roet o fiziañs da Strollad Komunour Portugal. Perak ? Moarvat n'eo ket hepken en abeg d'e araogelouriezh ha d'e sokialouriezh - a-walc'h a gevezerezh a zo war an tu-se - hogen ivez en abeg d'e genurzh had'e skiant eus ar Stad rak a-du gant ar genurzh hag an urzhaz e chom al luez - pe ne vefe ken anezho - ha gouzout a reer ez eo "Kreizennerezh Demokratel" strolladoù komunour an trede etrevroadelenn ur stumm arbennik nemet strizh mat a urzhaz.

N'eo ket gwirheñvel e vo graet warc'hoazh beure e Bro-C'hall un dispac'h a seurt gant hini ar Portugal ; hogen soñj am eus bezañ lennet ur pennad bennak - am eus meneget endev, emichañs - e-barzh ur gelaouenn gaolour a-gleiz o tremmañ ouzh kenlabour ar C'haolourion a gleiz end-eeun gant ar gomunourion, paotred an Urzh hag an "Dishualded Vroadel" en ur c'henarroud dispac'hel bennak.

Seul naturoc'h e vefe hevelep kenlabour ma vank d'ar c'hevredigezhioù kornogat un uhelvennad a zo bet pourchaset pell amzer gant an Iliz hag ivez, e-pad ur pennad, gant renadoù zo evel hini Republikoù Bro-C'hall amparet gant ar vourc'hizion pe ar faskouriezh e broioù zo (ne vern pezh a soñjer eus an uhelvennad-se : ur gealiadurezh a bourchase d'ar Stad).

Kemeromp avat lu ar Portugal. Gant peseurt renkad ez eo pourchaset hiziv an deiz ar pep brasañ eus e frammoù ? Evel e Bro-C'hall n'eo ket mui gant renkad hengounel ar vrientinion - a zo dister tre e niver, n'eus forzh penaos, - gant renkad ar vourc'hizion vihan hag etre o deus pourchaset o bagadoù da zispac'herion Rusia, Alamagn hag Italia abaoe deroù ar c'hantved. Ar vourc'hizion vihan avat a zo prest da heuliañ kerkoulz, - en un enkadenn bennak - komunourion an trede etrevroadelenn hag ar faskourion o unan, gant ma vo tu da virout un urzh zo gant an eil re pe ar re all.

Kentel Portugal a c'hell talvezout evit Breizh ivez. Eveljust n'eus lu ebet en emsav ha moarvat n'eus ket kalz tra a-dreñv da leurenn-c'hoari ar FLB-ARB. Hogen lakaet e tiwanfe un deiz bennak un nerzh-lu dispac'hel e Breizh ez eo kredaple klaskfe an atebieion anezhañ ur gwarant kealiadurezhel en un damkaniezh politikel bennak a c'hellfe bezañ pourchaset gant strolloù ha n'int c'hoazh nemet strolloù-studi.

Pezh a ranker kounañ eo n'eus forzh penaos eo n'eus ket kalz a lec'h d'an "demokratelezh" en un degouezh dispac'hel bennak. Komz a reer eus muianiveroù "dilavar" e ser ar Portugal ; kement-se n'en deus ket kalz a ster ; ar re a goñt e politikerezh n'eo ket ar re a chom er gêr o c'hortoz fin ar bed pe a laka ur bilhed-mouezhiañ bep pemp bloaz en ur voest-koad hogen ar stourmerion a gemer riskloù bemdez war an dachenn emgann hag a zo gouest, da vihanañ, da ziskenn war ar straed. D'an tropelloù dibolitikel o taskiriat e pradoù druz an "american way of life" ez eo miret, eveljust, un devezh bennak, gwarez poellek an "despoterezh sklerijennet" a zo bet anvet a-wechoù en hon amer, Doue a oar perak, "Diktatouriezh ar Broleteriezh". (1)

(1) Marteze a-walc'h e ve kavet sokialourion e Breizh evit asantif e ve diazezet ar sokialouriezh dre heg e Breizh hogen hini ebet anezho ne harpfe keal ur c'hel-

KURDISTAN

Un istor mantrus eo hini Kurdistaniz diframmet etre galloudoù hag a nac'h hec'h harpañ adal ma n' o deus implij ebet ken da dennañ dioutañ. E-pad pell amzer he deus gellet Kurdistan derc'hel penn a-drugarez da sikour Iran he devoa darbar gant Irak ; ur wech adunvanet an eneberion gent ez eo bet aberzhet ar c'hevradad didalvez d'ar peoc'h nevez adkavet. Lavaret ez eus bet e oa bet dilezet Kurdistan dre m'he doa nac'h et heuliañ ul linenn bolitikel, klevit, ul linenn bolitikel a-gleiz, enebet ouzh an impalaouriezh amerikan ; neuz e vije bet renket e-touez ar broioù araogelour ha tud e-leizh dre ar bed o dije roet brud d'he stourm. Setu pezh o deus graet Palestiniz ha n'o devoa ket, moarvat, un hevelebiezh vroadel ken anat ha Kurdistaniz, hag, ivez, tostoc'h deomp, paotred ETA en Euzkadi.

Hogen douetañs a sav diwar-benn talvoudegezh ur seurt politikerezh evit pezh a sell ouzh Kurdistan. Da betra en dije servijet d'ar vro-se bezañ savet a-du gant Moskov o vezañ ma kave da renerion ar riez soviedat e oa gounidusoc'h dezho - hag a-bell - en em glevout gant gouarnamant Bagdad hag ar riezoù arabek all. Heñvel e c'hoarvezas evit Gana un nebeut bloavezhioù zo : war biv o dije gellet en em harpañ Ganaiz o vezañ ma ne fell ket d'ar Rusianed, forzh penaos, emellout e politikerezh afrikat riezoù ar C'hornog. Er c'hontrol o deus gellet Norzh Vietnamiz trec'hiñ peogwir o deus en em vataet eus sikour Sinaiz ha Rusianed en o stourm a-enep d'an Amerikaned ; hogen ne c'hellent ket ober e-giz-all ha ret eo gwelout ivez ar priz o deus paeet evit ren ur brezel tregont vloaz.

Arbennik e oa o degouezh, ne vern penaos, ha kement-se ne dalv ket e rank pep bro a glask adsevel degemer ul linenn bolitikel evel m'o deus graet ar re-se. Padal e soñj deomp e tle pep emsav kinnig d'ur vroad kalz en tu-hont d'an dieubidigezh vroadel hec'h unan. Marteze e oa re a c'hiz kozh broadelouriezh an emsavadeg e Kurdistan hogen dont tre e daelerezh ur sokialouriezh zo a oa dañjerus ivez dre 'n arbenn ma rae van o eneberion da vezañ araogelourion. Koulskoude o dije gellet bezañ klasket empennañ un dispac'h nevez en tu-hont d'an dazeilad boaz etre "kevalouriezh-frankizouriezh" an Amerikaned ha "sokialouriezh faskouriezh"

nebeut. Emdarzhok eo bet evit darn emgann Kurdistaniz, hini ur bobl a gouerion manet war ar maez dreist-holl, hep nemeur a gefredourion nag a sternioù grenatel ha bourc'hiz. Er c'heñver-se e lakafe Kurdistaniz da soñjal e Breizhiz an naontekvet kantved (o saviad a zo disheñvel krenn eveljust, a-hend-all, diouzh hini Breizhiz e dibenn an ugentvet kantved. Unan eus abegoù o droukverzh, moarvat, ez eo bet stuz re unseurt o c'hevredigezh a chome kentidik a-walc'h o doareoù ha divarrek da stourm ervat ouzh kevredigezhioù muioc'h arnevez eget o hini.

H.K.

=====

Ar rener : Y. Ollivier

Liestennet gant ar gelaouenn CPPP 50 015

...the ...
...the ...
...the ...
...the ...
...the ...
...the ...
...the ...
...the ...
...the ...
...the ...

...the ...
...the ...
...the ...
...the ...
...the ...
...the ...
...the ...
...the ...
...the ...
...the ...
...the ...
...the ...
...the ...
...the ...
...the ...
...the ...
...the ...
...the ...
...the ...
...the ...
...the ...
...the ...

...the ...
...the ...
...the ...
...the ...